

CAROLE GUILLERM

FRANÇOIS THIMJO ERLEC'HIER



La
Relève
pour la
France

MOUVEMENT
DEMOCRATE

UR PLAC'H YAOUANK SEDER HA STARTIJENN ENNI

GANT FRANÇOIS BAYROU

An nerzh nevez evit ar vro

SAVOMP A-GEVRED AR C'HENTAÑ KANTVED WARN UGENT !

Hiziv e rank Breizh ober dibaboù. Fellout a ra d'hor raktres degas d'ar vro cheñchamantoù evit talañ ouzh kudennoù an endro. Ezhomm hon eus sikour pep hini evit dont a benn.

EVIT MA VO AR VREIZHIZ STUMMET GWELLOC'H EVIT LABOURAT ER VRO

- Pouezhañ war politikerezh ar poloù kevezusted a-drugarez d'ar c'henlabour etrerannvroel, reiñ c'hoant d'an dud sevel embregerezhioù war tachenn an artisanelezh, al labour-douar, ar pesketezh, ar c'henwerzh, an douristezh, an tisavouriezh...
- Sikour pep lisead da zizoleiñ a-bep seurt micherioù ha da gavout labour er vro. **Ra vo kempouez an traoù e-keñver an deskadurezh** prevez, publik pe kevredigezhel.
- Skoulmañ **darempredoù stankoc'h etre skolioù-meur ar vro hag an takadoù micherel**; lakaat buan ar re o deus prenet skiant war ar vicher da gaout anaoudegezh evit o barregezhioù (VAE).

EVIT MA VO BREIZH KEMPOUEZH HA TOST DIOUZH PEP HINI

- Reiñ muioù a bouez d'an tachennoù gwan, e-keñver yalc'hadoù, hag oberiañ da gentañ evit ar postou-labour hag ar stummadurioù, al lojeiz, an transportoù hag ar yec'hed. Sikour da sevel **Tiez evit ar yec'hed** tost ouzh al lec'hioù o deus ezhomm anezho.
- Lakaat ur raktres bras evit sikour an dud : ar re gozh, an dud nammet, ar familhoù ha sikour da staliañ **tiez retred** en un doare kempouez war tachenn Vreizh.
- Dont a-benn da staliañ an **uhelgas** war an dachenn en he fezh, hag ober da gentañ war dro an takadoù hag a zo bet disoñjet (pellgomz, skingomz, skinwel, internet).

RA VO BRAVOC'H HOR BRO, HA PADUSOC'H

- Arc'hantaouiñ ar **Raktres FIER** : ur galv eo evit ar raktresoù liammet gant diorren energiezh an heol, energiezh ar mor, ar fotovoltæk, hag ar metanaat . goulennet e vefe digant ar Vretoned kemeret perzh evit ac'hantaouiñ al labourioù-se.
- Reiñ sikourioù d'an dud evit ma vefe an tiez kozhañ nevezaet da grennañ an ezhommoù tredan, fioul hag all.
- En ur zerc'hel o live produiñ, **skoazellañ al labour-douar hag ar pesketezh da labourat en un doare poellekoc'h ha doujusoc'h ouzh an endro**. Sikour war memes tro da ziorren war ar maez ar servijoù, an dudi, an douristezh, ar pourmenadennoù...

SAVOMP ASAMBLES UR RANNVRO KREñV EN EUROPA : BREIZH

- Ober eus Breizh unan eus Rannvroioù kreñv Europa en ur **adstagañ al Liger Atlantel arak 2014**.
- Prederiañ ivez war an doare ma vefe tu liammañ war eeun dre garr-nij Breizh ha kreizennoù ekonomikel ha politikel pouezhus ar bed.
- Lakaat e plas ur strategiezh digreizenniañ nevez evit dioren sevenadur ar vro, brudañ pinvidigezhioù hor bro war an dachenn-se. Kreñvaat politikerezh yezh ar Rannvro dre raktresoù liesseurt evit dioren ar brezhoneg hag ar gallaoueg.